


HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn	2
	Petra nevez ?	7
	Notennoù	19

Herve LATIMIER

Néandertal nu,
gant Ludovic Slimak,
Odile Jacob, 2022,
235 pajenn, 22,90€



Dizoloet ez eus bet kalz traoù diwar-benn den Neandertal abaoe un toullad bloavezhioù. Sur e vezer bremañ ez eus bet ganet bugale diouzh an daou spes peogwir e kaver un nebeudig genennoù Neandertal mesket gant re Sapiens e korf kempredidi deomp. An holl re o deus lennet 6 levrenn oberenn Jean M. Auel, *Earth's Children*, bet embannet etre 1980 ha 2011, ne vint ket souezhet.

Met n'eo ket evit-se ec'h anavezer mat Neandertal hag an doare ma oa aet diwar wel.

E-pad un tregont vloaz ben-nak en deus Ludovic Slimak, imbourc'her er CNRS, klasket roud Neandertal e lodennoù liesseurt eus Europa evit klask kompren penaos e veve.

Evitañ, ez eo sklaer e oa tud Neandertal un denezh met ur spes all, disheñvel diouzh hon

hini gant e zoareoù dezhañ da welet ar bed. Ha prest omp da zegemer seurt disoc'h.

E-touez an traoù a laka an aozer da lâret e oant tud ez eus ar fed en deus kavet roudoù strolladoù Neandertal a zebre tud en un doare lidel hep kaout un ezhomm groñs da gavout proteiennoù. Al liderezh a zo, evitañ, unan eus merkoù an denelezh.

Ur wech e ouzer e oa Neandertal ur stumm denelezh, ur wech e vezer sur eo bet e darempred gant Sapiens en Europa, e c'heller en em c'houlenn penaos en deus gellet disparisañ a-daoltrumm. d'ar mare ma erru Sapiens.

Evit Ludovic Slimak e c'heller lakaat a-gostez an deorienn e vefe Neandertal bet steuziet abalamour d'an naonegezh. Jibouez e-leizh a oa el lec'hioù ma veve. Roud ebet, betek-henn eus ur c'hleñved-red bennak.


N'heller ket soñjal e vefe kendeuzet Neandertal ha Sapiens, hervezañ. Spesoù disheñvel a c'hell genel re-vihan evel tigr ha leon, da skouer, met n'eo ket evit se en kendeuzont peogwir e vez peurliesañ difrouezh ar rummad nevez-se. Hervez ar pezh a zesk antropologiezh, ne

oa ket an eskemm etre an daou spes war ul live kevatal rak ma vez kavet genennoù Neandertal e-touez Sapiens, n'eus roud ebet eus ar c'hontrol.

Kendeuzadur ebet, na onegezh na kleñved, ha ne gaver roud ebet ken eus Neandertal just d'ar mare ma voe aloubet al lec'hioù ma veve gant Sapiens... War a seblant e oa aozet mat an aloubadeg hag e oa kalz uheloc'h live teknel Sapiens e-keñver armoù peurgetket. Peadra d'en em c'houlenn petra a c'hoarvezas un 40 000 bloaz bennak zo. Betek-henn n'eus bet kavet roud ebet eus lazhadegoù met...

Plijus eo stil an aozer ha degas a ra e oberenn un toullad goulennoù dic'hortoz. Petra 'ra eus ur spes un denelezh ? Prest omp da asantiñ e vefe bet meur a zenelezh o vevañ d'ar memes mare war an douar ? Penaos eo tremenet ar c'henstok etre Neandertal ha Sapiens ? Ha kavet e vo respontoù ? N'eo ket sur tamm ebet met danvez preder a zo, evit ar poent.

L'économie à venir,
gant Gaël Giraud
ha Felwine Sarr,
Les Liens qui Libèrent, 2022,
208 pajenn, 8,90€



Un diviz eo danvez al levrig-mañ. Un diviz etre daou ekonomour : Gaël Giraud, rener a enklaskoù er CNRS ha rener an *Environmental Justice Program* e Skol-veur Georgetown (SU), ha Felwine Sarr, skrivagner hag ekonomour senegalat, kelenner e Skol-veur Duke (SU). Dalc’het eo bet an diviz en Ensavadur ar studioù Uhel Naoned (*Institut des Études avancées de Nantes*) e miz Ewen 2019 ha klokaet e 2021 abalamour d’ar sklêrijenn nevez bet degaset gant ar C’ho-vid.

Un diazezadur dizalc’h anza-vet a dalvoudusted publik eo an Ensavadur. Krouet eo bet e 2007 diwar skouer ensavadurioù bet krouet e Princeton e 1930 pe e Berlin e 1980.

Resev a ra evit ur bloavezh Skol-veur imboure’herien eus ar bed a-bezh evit ma c’hellint

labourat en diavaez eus ar fram-moù boas, hini an diskiblezhioù, hini melestradurezh an imboure’h hag ar skolioù meur. Reiñ a ra pouez d’an eskemmoù etre skiantourien an “Norzh” ha re ar “Su”.

Kregiñ a ra al levr gant ur rakskrid gant Alain Supiot, bet kelenner gwir er Skol-veur, bet kelener er Skolaj Frañs, diazezer Ensavadur Studioù Uhel Naoned. Burutellañ a ra aozadur kreizennet an imboure’h publik e Frañs hag an doare d’e ren evel un embregerezh hervez lezennoù ar marc’had. Evitañ ez eo diboell an ekonomourien a glask ober eus an ekonomiezh ur skiant evel ar fizik gant lezennoù resis. Lod diazezoù zo direizh, anat, evel mojenn ar “bevezour poellek”. Sevel teoriennoù pe diaweloù war diazezoù faos zo un tamm iskis

ha rall eo e klokfent gant ar pezh a dremen e gwirionez. Unan eus skiantoù an den eo an ekonomiezh. Pouezañ a ra kalz war roll an eskemm plaen ha doujus evit lakaat an traoù da vont war-raok : « *C'est le propre de la conversation d'être contagieuse lorsqu'elle ne vise pas à "jeter l'autre à terre", mais "à penser différemment pour parvenir à penser de même".* » (p.22)

Ur skouer war an holl dachennoù eo an diviz a zeu da-heul. Un eskemm gwirion gant daveoù liesseurt : ekonomiezh, sokiologiezh, istor, prederouriezh, teologiezh, antropologiezh...

19 rann a gaver en diviz. Dibosupl eo reiñ un tañva eus pep hini. Dedennus int holl, ar yezh zo a-wechoù, un tamm "uhel". Imbourc'herien int neketa. Danvez preder a gaver e-leizh.

Ober a rin meneg memes tra eus un nebeud traoù. Er rann gentañ, *Hériter de la modernité*, e tiskouezont en deus ar C'hornôg gellet rediañ ar bed a-bezh da blegañ d'e zoare da welet an traoù ha, dreist-holl, da lakaat ar poell da vezañ mestr nemetañ ar preder hep delc'her eus an

doareoù all da soñjal. Disoc'hoù prantad ar Sklêrijennoù a c'hell bezañ spontus ma weler ar poell nemetken oc'h ankouaat ar palioù : « *La rationalité stratégique, celle qui refuse de s'interroger sur les fins ultimes de notre existence collective, est pareillement capable de conduire au goulag et à Auschwitz.* » (p.31)

Un tamm pelloc'h er rannoù pevar (*L'usurpation néoclassique*) ha pemp (*Qui dit la norme ?*) e lenner e krogas ar c'hoant da ober eus pep tra ur c'hapital a-raok ar ^{vet}XIV kantved en Italia ha gwashaet goude gant ar Sklêrijennoù o deus graet eus ar berc'hentiezh un dra sakr (pp.56-57). Koulskoude ez eus un diforc'h etre ar frankizouriezh klasel hag ar pezh a vez anvet ganto "goude-frankizouriezh" : « *Le libéralisme classique consistait à faire du Droit une digue contre la tyrannie de l'État.* » (pp.70-71) ; « *Le postlibéralisme commun essaie d'absorber la totalité de la sphère vivante et sociale à travers une quantification mise au service de la privatisation du monde.* » (p.70) ; « [...] *le terme de néolibéralisme est trompeur en ce qu'il suggère une filiation*

avec le libéralisme des Lumières : en réalité, les postlibéraux actuels, de Margaret Thatcher à Emmanuel Macron, sont les fossoyeurs du libéralisme. » (p.71) Er seizhvet rann : « Nous sommes dans un temps où il est plus qu'urgent que la pensée philosophique et


éthique reprenne sa place, où les philosophies morales qui ont été évacuées du corpus des facultés d'économie devraient de nouveau être enseignées. »

Spi 'm eus bezañ roet d'al lennerien c'hoant mont pelloc'h gant an daou divizer ken pinvidik ha liesseurt o eskemmoù...



**Magali BARON,
Herve LATIMIER &
Malo BOUËSSEL du BOURG**

**Micha Riou (1993 - ?) &
Gwastell ar Rouaned,**
gant Riwal Huon,
Al Liamm
108 pajenn, 9€



Gwall zisheñvel an eil diouzh eben eo an div danevell-mañ. « Micha Riou (1933 - ?) » a gont penaos e vez divarc’het, laouenaet ha treboulet Tual Appere, micherour e porzh-koñvers Brest, oc’h ober anaoudegezh gant ur vaouez paket

gant ur c’hleñved grevus. « Gwastell ar Rouaned » a bled gant istor burzhudus Arzhur Paugam, en deus lonket dre zievezh favenn ar wastell ; tro-dro dezhañ e krog darvoudoù iskis da c’hoarvezout, a ziskuilh dezhañ peseurt galloudoù hud a

vez gantañ hiviziken. En danevell gentañ en em gaver tal-ouzh-tal gant ur gwirvoud doanuis, ha gant poltred ur vaouez skoemp evel ul loen gouez, kollet he hent ganti, o tiwaskañ poanioù. Padal eo skañvoc'h, laouenoc'h an eil ; digeriñ a ra bed ar moliac'h, bed an hunvre, ma teu an orkide da greskiñ pa vez sonet gitar dezhe, hag ar paotr yaouank Arzhur da vezañ ur gwir varc'heg.

Koulskoude ez eus un dra a zo boutin d'an daou istor : ar mare ma oant bet skrivet. Diwanet e oa « Micha Riou (1993 - ?) » da goulz ar genfinadeg, gant ar soñj krouiñ ur seurt stirad skingomz. Ne oa ket neuze un destenn tonket da vezañ embannet, met kentoc'h un doare da virout ul liamm etre izili ar familh en ur mare digenvez. Etretant e oa deuet keloù fall eus yec'hed Gwen Huon, breur an aozer, a oa aet d'an Anaon bloaz goude, e miz Ebrel 2021. Deuet e oa plane-denn Micha Riou da vezañ un heklever da hini Gwen, gant ar spi e c'hellfe ar goanag bet silet en istor teurel sklêrijenn war doan ar c'hlañavour. Evit Gwen e oa bet skrivet an eil danevell : « N'eo ket lennegezh am eus

skrivet ; ur skrid evidoc'h an hini eo. [...] C'hoant ganin skrivañ ur skrid a spi, farsus kentoc'h, o lakaat burzhud ar vuhez da vezañ trec'h. Ha bezañ *homme-médecine* pareer, piv 'oar ? »

Alese an deneridigezh, ar fent, an douster, ar skañvder bet silet en danevelloù-mañ, e « Micha Riou (1993 - ?) » zoken, daoust d'ar ranngalon ha d'ar fin a chom digor, hep na c'hellfer gouzout peseurt levezon en do ar sklêrijenn vresk-se war blanedenn an div dudenn. Diskuliañ a ra ar skridoù-se peseurt feiz en deus an aozer e galloud al lennegezh, a zo amañ war un dro ur bedenn, ur stourm, hag un testeni a garantez. Penaos chom tost d'unan bet paket gant ur gwall gleñved, penaos bezañ gantañ pa ziwask poanioù hag anken dreist-diraec'h ? Ur seurt distro a vez kinniget gant al lennegezh, un doare dizeeun da astenn an dorn ha da vezañ war-dro. Roet en deus an aozer e c'halloud frealz d'e dudennoù, da hini Arzhur evel-just, da hini Tual Appere dreist-holl, gant e gizidigezh ouzh gloazadennoù ar re all, gant e aon da dostaat, gant e zoujañs, e abafder zoken.

Moarvat ez eo Riwal Huon heñvel a-walc’h ouzh Tual Appere : « En e ziabazh e rae poanioù an dud o hent ha toullañ skoaselloù don [...] » Santiman-toù e dudennoù a dap krog ennañ, ha gwelet a ra anezhe, daoust dezhañ zoken. An aozer zo, un tamm evel Marguerite Yourcenar, unan a vev gant e dudennoù, a gomz diwar o fenn evel pa vefe anezhe evit gwir, evel pa glaskfe ober anaoudegezh gante, ha neket “sevel” anezhe. Se zo kaoz e seblant ken gwirion, ken naturel ar skrid ; da skouer pa vez deskrivet fallaenn Micha Riou ; pe diskouezet jestroù bihan Tual o stalíañ an daol diouzh beure. A-wechoù e chomer hep kompren, pe en amzivin : met paket e vezer gant bezañs an dud-se.

Ar skeudennoù ivez n’int ket skeudennoù rikamanet, bet klasaket pell evit ma vefe estlamm oute gant al lennerien ; intret a varzhoniezh eo ar skrid, dont a ra flour ha didrouz avat, a-bazioù boulouz. Pa vez Micha Riou war-nes semplañ e skriv an aozer : « Ur vagig o kuitaat ar porzh a bouleñve war ar mor du. » Diskouez a ra seurt skeudennoù galloud an ijin, galloud ar “chaokerien-soñjoù” – evel

tonton Jakez, contr Tual Appere – a ro da welet ar bed en un doare nevez.

Estreget ur pal lennegel o doa an div danevell-mañ ; koulskoude e tegasont soñj, an hini gentañ dreist-holl, eus perzhioù lennegel gwellañ an aozer : an doare da gendeuziñ diavaez ha diabarzh an tudennoù (spurmantet e vez en un taol o neuz hag o c’halon), ar mone-doneoù en amzer (a ro santimant bezañs an amzer dremenet en amzer-vremañ), ar varzhoniezh, ar c’hoant da ziskouez kentoc’h evit da zisplegañ... Gant ma vo un digarez da adlenn *Ar marc’h glas* (2010) ha *Merc’hed gwisket e du* (2015), un danevell a gont istor merc’hed en Enez-Eusa tro 1900, hag a zo moarvat unan eus kaerañ levrioù brezhoneg bet skrivet biskoazh.

MB

Lavar 21,
Preder,
417 pajenn, 25€




Chom a ra skipailh Preder war e erv. Ha toullañ don a reont. Pevar bloaz zo aet hebiou abaoe embannidigezh niverenn 20 *Lavar*, ma oa renablet goulennou yezh Martial Ménard ha respontoù Guy Etienne ha Yann-Ber an Noalleg. O labourat a-zevri edo Matial war e c'heriadur bras galleg-brezhoneg e 2012. Pevar bloaz neuze, amzer da beurechuiñ pikol *Geriadur ar Vezekniezh* Preder. En niverenn nevez-mañ e vez kendalc'het gant goulennou termenoniezh Martial, dreist-holl. Goulennou resis ha respontoù ken resis all, displeget fraezh. E fin al levr e vez kinniget daou veneger diziouerus, unan brezhoneg hag unan galleg. Ur vengleuz evit ar c'heriadurourien a-vremañ ha da zont. Ouzhpenn un akt a feiz an hini eo. Eus un ober politikel ez eus kont. Evel ma vez embannet sklaer er raksrid : « Ha kollet o defe an dud o

skiant vat ? [...] Perak e kavont gwell kavout fiziañs en aotrouniezhioù estren ? » Mat e vo, un deiz bennak, ma kav skipailh *Preder* energiezh hag amzer a-walc'h, kendeuziañ labourioù *Preder* en ur geriadur hollek, aes ober gantañ. Trawalc'h e vefe gant ur stumm niverel, a vo kalz marc'hadmatoc'h...

Mb dB

**Plant gouez ar vro
er gegin,
Nos plantes sauvages
en cuisine,
gant Tim Lipous,
An Alarc'h embannadurioù,
172 pajenn, 20€**




N'eus ket kalz levrioù gouestlet d'ar vuhez pemdeziek e brezhoneg. War dachenn ar c'heginañ ez eus bet moulllet un toulladig levrioù c'hoazh. Met pa 'z eus anv eus levrioù modern, skeudennaouet kaer, ha plijus da lenn, n'anavezan nemet levr Nathalie Beauvais, *Best of Breizh*, bet troet e brezhoneg e 2020. Ur blijadur eo neuze gwelout *Plant gouez ar vro er gegin* o tont er-maez, rak ul levr chik-ha-cheuc'h eo, hag ouzh-penn keginañ a vez kinniget gant an aozer. A-drugarez da dTim Lipous, a zo keginer a-vicher e Bro-Dreger, e reer anaoudegezh gant ur pemzek plant gouez bennak eus ar vro. Un deskriv berr ha resis a vez roet eus kement hini anezho. Diwar ar plant keginañ-se eo bet ijinet ar rekipecoù. Gant e levr-heñchañ e vez kelennet meur a dra deomp gant Tim Lipous :

anavezout an natur tro-dro, arz ar c'heginañ vejeterian, ha gerioù brezhoneg evel-just. « Anat e oa evidon skrivañ brezhoneg. Dre ar yezh em eus desket eus pelec'h e teuan [...]. Hervezon, n'eus disparti ebet etre difenn liesseurted ar yezhoù hag ar sevenadurioù, ha difenn ar vevliesseurted. » Evit kement louzoù-keginañ e kinnig Tim Lipous tri rekipec aes. Peadra d'ober un dro-furch war ar maez a-raok fardañ boued gant ur vandennad kañfarded ebatus. Bec'h de'i ! A-raok pell e tañvaot *empanadas* linad ha legumaj, fourmaj fresk gant anigez, dour pik-pik bleuñv skav, pe *pesto* delioù stlañvesk... Digorit ho kalon !

MbdB

Ribin-diribin,
gant Jorj Abherve-Gwegen,
An Alarc'h Embannadurioù,
174 pajenn, 10€



Ur foeter-bro touet a zo eus Jorj Abherve-Gwegen. Tro hon eus bet alies da lenn notennoù beaj dindan e bluenn. Daou zastumad anezho a zo bet embannet gant *Aber : A-hed ar Panamericana* ha *Dizoleiñ ar broioù balt*. Met dibabet en deus ar skrivagner mont gant hent ar faltazi abaoe *Morlenn*, ur romant kentañ lec'hiet e Brest, kinniget gant an Alarc'h Embannadurioù.

Gant *Ribin-diribin* e vez liammet e garantez evit ar beajoù ouzh ur romant deskoni a grog en Naoned, en ajañs beajiñ D., ur gompagnunezh kirri-boutin a oar kas touristed d'an estrenvro, un tammig e pep lec'h en Europa. Lomig Koativi, studier eus e stad, a zeu da vezañ heñcher touristed e-pad e vakañsoù, kement ha dastum un tammig arc'hant godell.

E-pad ar veaj kentañ e reer anaoudegezh gant troioù ar vicher, a-drugarez d'ur bleiner un tammig *borderline*. Tapet omp gant avanturioù ar paotr yaouank rediet da zirouestlañ kudennoù luziet pe luzietoc'h en ur c'houzañv stultennoù ar veajourien. Tu-gin al leurenn neuze ha gant un tamm mat a fent. Ken gwirheñvel eo ma teuer da grediñ en deus mesket Jorj Abherve-Gwegen eñvorennoù personel en e skrid.


Diaes eo bet d'an aozer derc'hel gant kement a startijenn goude ar veaj kentañ-se avat. Un tammig gwanoc'h e teu da vezañ al levr neuze, a-raok adkavout ul lusk nevez, tamm-ha-tamm, diwar istor karantez Lomig Koativi en Okitania. En trede lodenn-se e kav an dezrevell un eil buhez. Koulz e-keñver an darempredoù denel,

soutil hag eleveziek, hag
e-keñver pinvidigezh sevenadur
ha kened Okitania, a vez

diskouezet deomp gant birvillh
hag estlamm.

MbdB

Ar Fri,
gant Nikolai Gogol,
brezhoneg gant
Anna Mouradova,
An Alarc'h Embannadurioù,
43 pajenn, 6,50€



Berr, met kreñv ha diroll !
Plijadur am eus bet ken-ken
oc'h adkavout e brezhoneg unan
eus skridoù brudetañ *Danevel-*
lou Sankt Petersbourg, skrivet
gant Gogol¹. Embannet e voe *Ar*
Fri e 1836 evit ar wech kentañ.
Implijad en ur ministrerezh e oa
an aozer d'ar c'houlz-se, ha ne
oa ket aes dezhañ, moarvat,
tagañ ken taer ar melestraj, ar
gazetennerien, ar vedisined, ha
pennoù-bras a bep blev, hep
risklañ bezañ toullbac'het pe
skarzhed... Sed e rankas ober
gant nerzh e ijin: metaforennoù,

¹ E-touez oberennoù Gogol e ranker
menegiñ *Tarass Boulba* ivez, bet
troet e galleg gant hor skrivagner
Jarl Priel e 1927 ! Aes eo da gavout
war lerc'hienn *Abebook*.

fent, nann-ster... evit goapaat ha
stagañ drezen dizañjer !

Ar Fri neuze... Istor ar c'hargi-
giad Kovalev, un den c'hwezhet
gant al lorc'h, a goll e fri hep
gouzout an doare, ha gant e fri,
e zinded evel-just... E varver, ar
paourkaezh Ivan Yakovlevitch,
en deus kavet ar memes deiz, da
vare lein, ur fri e-kreiz an tamm
bara edo war-nes dantañ a galon
laouen... Iskisoc'h c'hoazh, un
den-fri, pe un Aotrou-Fri, pa
lavarin mat, gwisket en e faroan
evel ur c'hargiad uhel, a zo o
pourmen e galite war e jibidorig
dre valioù Sankt Petersbourg.
Nijellat a ra pluenn Gogol eus
ur sal-c'hortoz d'eben hag eus
un dudenn d'eben, gant skañv-
ded un dañsour. Pep hini a bak e

begement. Kovalev a red war-lerc'h e fri, hep na vefe soñjet gant den teurel diskred war un istor ken foll... Etre realouriezh kriz ha marzherezh digabestr e kav al lenner hent e levenez a-aes-vat.

**Ar bleiz droch
livet en glas,**
gant Gilles Bizouerne,
skeudennaouet gant
Ronan Badel,
brezhoneg gant Mark Kerrain,
Sav-Heol,
32 bajenn, 13€

Setu eil albom chañsoù ar *Bleiz Droch*. Ar paourkaezh bleiz a zo o kantreal war-lerc'h e voued, ruz e vouzelloù. Kouezhañ a ra en ur jarlad liv glas. « Ur bleiz glas gant an naon du, biskoazh kemend-all ! » Klask a ra al loen droch tennañ splot eus e liv nevez evit desachañ e breizhoù hag o c'has d'ur c'hoad teñval. Diaesoc'h an traoù gant ar glav o tont... Anavezet e vo kentel fablenn an herlegon gant karourien La Fontaine. *Ar Bleiz droch livet en glas* a blij kalz d'ar vugale dindan seizh vloaz. Kement-se am eus bet tro da wiriañ mintin abred em gwele... Testennoù al levr a zo berr ha

Trugarez vras, Anna Mouradova, da vezañ profet deomp ar blijadur lenn-se. Gant ma kavoc'h tro da dreñ peurrest torkad Gogol hep re a zale, e Breizh !

MbdB



savet diwar azlavaradoù, ken ez int aes da gompren. Boemus ha fentus war ar memes tro eo an tresadennoù. Ar skrid a c'heller selaou war lec'hienn *Kuzul ar Brezhoneg*, war bajenn *Sav-Heol*.

MbdB

Adkavout he roud,
gant Yann-Fañch Jacq,
Keit Vimp Bev,
118 pajenn, 9€




Ur romant polis berr evit ar grennarded a ginnig deomp Yann-Fañch Jacq. Intret eo *Adkavout he roud* gant ar vuhez kempred. Koubladoù gwallgaset, karantezioù bet, ul lisead harellet, mignoniezh ha dial... Hag e-kreiz ar jeu, marv ur plac'h. Gwallzarvoud pe muntr ? Gwall rouestlet eo an afer. Tapet omp diouzhtu gant an dezrevell. Yann-Fañch Jacq en deus ar stek da vont e-barzh didro. Tamm-ha-tamm e teu da vezañ luzie-

toc'h an itrik. Met kaset eo an enklask gant tudennoù kig-hag-eskern : Juluan, Berc'hed hag he c'hi Toutou Krazig... Dav da Juluan en em silañ etre lagadennoù strishoc'h-strishañ rouedoù an arme. Dont a ra a-benn da antellañ un traped d'ur penn-bras a vez diskred warnañ gant harp e vignonez Berc'hed, a zo o labourat er polis. Met dañjerus eo c'hoari gant an tan...

MbdB

**Langue bretonne,
langues minorisées :
avenir et transmission
familiale,**
testennoù bodet gant
Immaculada Fàbregas-
Alégret hag Herve
Le Bihan,
TIR,
171 pajenn, 15€



Aktoù ur c'hollok eo al levr-mañ. Testenn eizh prezegenn a gaver ennañ. Div eus an eizh testenn a zo e saozneg. Skouerioù eus Katalonia, Bro-Skos, Okitania, Bro-Gembre, Bro-Iwerzhon ha Breizh evel-just, a vez studiet. Mard eo pep pennad a-zivout un enklask resis peur-liesañ, e ro tro da vagañ ur preder hollek war plas diazez treuzkas ar yezh er familhoù ha war ar politikerezhioù a c'hellfe e sikour. Ur meneg ispisial a rin eus pennad Tadgh Ó Hifearnáin diwar-benn Iwerzhon : « *La transmission intergénérationnelle de la langue irlandaise : familles, écoles, État* » Abaoe staliadur ar Stad Dieub betek bremañ e c'hell Republik Iwerzhon sevel he folitikerezh yezh. Abaoe 1922 e vez kelennet Iwerzhoneg en holl skolioù kentañ derez. Tri rummad skolioù a

oa er penn kentañ : holl iwerzhonek, iwerzhonek evit un darn eus an danvezioù, iwerzhoneg evel danvez studi nemetken. Ar pal a oa, evit ar re gredusañ, e teufe an holl skolioù da vezañ holl iwerzhonek. Pell emañ Yann diouzh e gazek. Desket e vez er pennad e oa dija ur plas er skolioù evit an iwerzhoneg abaoe ar bloavezhioù 1870, evit ma teskfe ar vugale saozneg buanoc'h... Politikerezh ar *Gaeltacht*(où) hag ar yalc'hadoù roet adalek 1933 betek 2011 d'ar familhoù a save o bugale en iwerzhoneg a seblant souezhus a-walc'h evidomp, Bretoned. Forc'hellek eo ar bilañs. Un dra nec'hus a zo, koulskoude : n'eo ket dreist saviad ar yezh daoust dezhi bezañ yezh ofisiel ar Stad ha kelennet en holl skolioù. Bezañ "yezh ofisiel" a sikour met ne ziskoulm ket pep tra, pell


ac'hane. Binvioù all a zleer klask evit magañ c'hoant ha youl e-touez an dud...

Gellout a reer bezañ un tamm digalonekaet o lenn al levr met gwelloc'h eo gwelet an traoù evel m'emañ, gant o zuoù fall hag o zuoù mat, eget bevañ en ur bed mojennel. Poli-

tikerezhioù yezh a c'heller lakaat e plas, d'ar re a gomz ur yezh vinorelaet da stourm evit ma vo graet. « N'eus ket ezhomm da gaout spi evit kregiñ e-barzh na da zont a-benn evit kendelc'her, » eme Willem van Oranje, hervez.

HL

**Algues vertes,
L'histoire interdite,**
gant Inès Léraud ha
Pierre Van Hove,
Delcourt,
160 pajenn, 19,99€.



Daoust ma 'z eo bet emban-
net e 2019 e kinnigan d'hol
lennerien al levr-mañ er rann
« Petra nevez ? ». Daou abeg :
kontammet eo aodoù Bro-
Dreger ha Bro Sant-Brieg peur-
getket abaoe bloavezhioù ha
tabut zo bepred war o orin hag
an diskoulmoù evit mirout
oute ; emañ ar film *Les algues
vertes* savet gant Pierre Jolivet
diwar al levr bannoù-treset o
paouez dont er-maez. Ober a ra
berzh e korn-bro Lannuon ha
spi 'm eus e raio e lec'h all.
Kontañ a ra an div oberenn-se
an enklask bet graet gant ar

gazetennerez Inès Léraud e-pad
meur a vloavezh a-zivout marv
tud ha loened abalamour d'an
hidrogen sulfurek produet gant
ar bezhin pa vreïn. Gwelet a reer
ar skoïlhoù diniver lakaet war
hent an enklaskerezh pa ra al
liamm etre al labour-douar pro-
duadurour hag ar saotradur-se.
Emzalc'h mezhus servijoù ar
Stad hag un darn eus an dilen-
nidi o nac'h ar fedoù, o kontañ
gevier, o plegañ dirak embrege-
rezhioù bras an industriezhioù
gounezvouedel a oar drouktunañ
en anv ar c'hresk ekonomikel,
ar postoù-labour, an douriste-

rezh... ar c'hevelourioù en o zouez, siwazh. Doareoù rukunus sindikad brasañ al labourerien douar a oar gourdrouz koulz al labourerien-douar o-unan hag an dud a glask lâret ar wirionez gant doareoù gwidreüs pe feuls. Ouzhpenn lenn al levr – a zo o paouez bezañ troet e brezhoneg – ha gwelet ar film e c'hell hol lennerien lenn *Silence dans les champs* gant Nicolas Legendre, embannet ar bloaz-mañ gant

Arthaud ha *Le livre noir de l'agriculture / Comment on assassine nos paysans, notre santé et l'environnement* gant Isabelle Saporta, embannet e 2011 gant Fayard.

Kavout a reer aze abegoù da stourm enep ur sistem a wask an dud hag a zistruj an endro evit sevel unan a ouezo bezañ e servij mad an holl ha mad ar blanedenn.

HL

**Annaig KERVELLA,
Herve LATIMIER &
Tudual HUON**

HOR MIGNONED _____

Kaňv :

Tecwyn Evans, Kembread, a zo aet da Anaon e dibenn miz Gwengolo. Edo o chom e North Kembre war an harzoù gant Bro-Saoz. Desket en doa brezhoneg ha kemeret perzh e *Kamp ar Vrezhonegerien* keit ha ma c’helle dont da Vreizh. Dalc’het en doa da gaout liammoù gant e vignoned dre bostel dreist-holl ha n’eus ket pell c’hoazh e pellgomze e brezhoneg eus an ospital d’e vignoned kozh. Derc’hel a raimp soñj eus an den hegarat, c’hoant gantañ bepred da c’houzout ar pezh a c’hoarveze en hor bro hag er broioù keltiek all.

Louis Lofficial, Loeiz evel ma veze anvet alies a zo aet da Anaon d'ar 24 a viz Eost d'an oad a 77 vloaz. Anavezet mat e oa e Poullaouen el lec'h m'en doa savet *Nozvezh ar gavotenn*. Brezhoneger hag emsaver, mañsoner eus e vicher hag ezel eus an UDB en doa skoulmet darempredoù un tamm e pep lec'h e Breizh hag en diavaez bro, dreist-holl e Kembre.

PROFOÙ

Miz Even : Glaodig LIABEUF-LE MAGUER ; Herve AR BEG ;
Per LAVANANT ; Mikael ROUBY ; Marie-Rose PIPET ; Pierre-
Emmanuel MARAIS ; Yann-Varc'h COCHET ; Sylvie AR MOAL
— War un dro : 105€

Miz Gouere : Jean BOULBRIA ; Yves GUILLOU ; Michel LE
ROY ; Damaris MERLET ; Jean-Yves LE GOFF
— War un dro : 115€

Miz Eost : Goulven DONVAL ; Jean-Pierre FOUILLE ; Yves
MERVIN ; Jean-Michel MAHE ; Laurence LAVRAND ; Loik
CHAPEL ; Drian BERNIER ; Gweltaz ADEUX
— War un dro : 81€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

LIZHER

Digant Daniel Doujet, diwar-benn niverenn 459 Al Liamm :

« ... Faou, kistin ha derv... Gellet ho pehe lakaat sonenn Gwernig
en ho niverenn 459, met gwir eo n'heller ket lakaat pep tra. Nag a
varzhonegoù a zo bet savet d'ar gwez, nag a sonennoù...

Èl ma komze Soaz an Tieg a Chateaubriand e ta din soñjal em
boa graet ur gronikenn diàr e benn, e miz Eost 2022. Adkempennet
em boa ar gronikenn-se diàr ur pennad am boa savet 30 vlez a-raok
evit *La Liberté du Morbihan*. »

Kronikenn 190 : « Chateaubriand hag an neizh pik »

Etrezomp-ni e brezhoneg gant Daniel Doujet war lec'hienn
Emglev Bro an Oriant

51^{vet} LID KOLIER AN ERMINIG

Dalc'het e oa er bloaz-mañ d'ar Sadorn 7 a viz Here e kêr Dinan, sal C'hoariva ar Jakobined, nepell eus Tour Yann IV Dug Breizh, krouer Urzh an Erminig, er bloavezh 1381.

Eno e oa bet enoret 4 den er bloaz-mañ (ekonomiezh, yezh, istor, sevenadur...).

« *Un degouezh istorel a-zoare evit an 51^{vet} lid !* » a lavare maer Dinan, an aotrou Didier Lechien. Plijet-bras eo e vefe bet al lid eno.

- Joël Cornette, kelenner Skol-veur, a zo bet enoret evit e labour war Istor Breizh.

- Nathalie Beauvais, keginourez, evit he doare da lakaat sevenadur Breizh war wel en he freti en Oriant kement hag el levrioù rekipoù embannet ganti.

- Ronan ar C'hoadig, kelenner Skol-veur, evit e studiadennoù niverus war Breizh a-vremañ.

- Monique ar Boulc'h evit he labour pouezus gant ar brezhoneg e Radio Bro Gwened, lec'h m'he doa roet lañs d'an abadenn « Kreiz mintin » ha dalc'het da vont da enrollañ brezhonegerien a-vihanik e-pad 10 vloaz.

40 VLOAZ AN UBAPAR

Kemeret ho peus perzh en ur staj aozet gant an Ubapar deiz pe zeiz, e galleg pe e brezhoneg : ur c'hamp vakañsoù, ur staj DABU pe DARE, ur stummadur micherel, ur raktres bennak pe traoù all c'hoazh ? Ha plijet e vefec'h o kemer perzh e gouel deiz-ha-bloaz 40 vloaz an UBAPAR ? Ya ? Emgav neuze e Rostrenn ar bloaz a zeu d'ar Sadorn 20 a viz Ebrel !

Emañ an Ubapar o klask tud a youl-vat da gemer perzh er strollad-aozañ. Emgav dre vizio ur wech bep miz pe e Rostrenn, gant sikour ur c'hopradez eus an Ubapar, rannañ al labour, a-benn kas da benn ar raktres-mañ.

Kit e darempred gant ubapar@ubapar.net

C'HOARIVA

Ur staj evit an deraouidi pe an dud ampart kinniget d'ar Sul 12 a viz Du etre 10e ha 5e noz e Roazhon.

Aozet gant kevelerezh Skeudenn Bro-Roazhon, an ADEC35-Ti ar C'hoariva departamant an Il-ha-Gwilen ha C'hoariva.

Un devezh asambles evit mont war al leurenn da c'hoari e brezhoneg. Pleustret e vo war ziazezoù ar c'hoariva en un aergelc'h distenn.

Enskrivadurioù : ADEC-Ti ar C'hoariva pe C'hoariva

HENTOÙ GWENN

Un arvest evit dizoloiñ istor al laezh hag e sekredoù. Goude bezañ beajet, savet enklaskoù, o doa tud skipailh Teatr Piba rannet o santimantoù, o mennozhioù en un doare a-stroll evit sevel ur pezh-c'hoari skrivet gant David Wahl.

Ur staj kinniget e kevelerezh gant meur a gevredigezh : An ADEC-Ti ar c'hoariva Il-ha-Gwilen, Skeudenn Bro-Roazhon da-geñver Festival Yaouank, Ti ar Yaouankiz La Paillette ha C'hoariva. Ar staj-mañ a vo liammet kreñv gant tem an arvest *Nos voies lactées - Hentoù gwenn*. Rannet e vo o mennozhioù gant ar stajidi gant ar pal krouiñ ur stumm c'hoariva bihan ha c'hoari anezhañ e dibenn ar staj.

Stummerien : *Thomas Cloarec eus Teatr Piba sikouret gant ar c'heginer Sebastien Durand.*

Deiziadoù :

D'ar Sadorn 27/01 etre 1e g. m. ha 7e noz

ha d'ar Sul 28/01/2024 etre 10e ha 5e noz.

Lec'h ar staj hag enskrivadurioù (e galleg) :

ADEC-Ti ar c'hoariva Roazhon

ha m'ho peus c'hoant lakaat hoc'h anv e brezhoneg kasit ur gerig da C'hoariva.

MADARJEU : AN TWITS

How to outwit a twit ? Penaos divleupañ ur bajaneg ?

« Deus ar re flaeriusañ, deus ar re zroukañ koulz ha deus ar vilañ zo tout eo an Aotrou hag an Itron Twits, ha se er bed-holl... Poazh eo Muggle-Wump, ar marmouzh, gant kement-se, trawalc’h ! Arru poent eo kas an dorzh en-dro d’ar gêr ! »

The Twits zo un istor a wallgas a ziskloz an nen, un istor teñval ma ya bugale koulz ha loened da reuzidi c’hoarioù kriz Mab-den. Ur mod dishañval da lenn a faot deomp-ni kinnig d’an arvestourien.

Ar c’hinnig divyezhek-mañ a laka ar publik da gemer perzh e brezhoneg, o lakaat anezhañ da vezañ a-evezh war ar gerioù-alc’hwez e saozneg. An difi a vo kavout bonegoù dre gomz an divinadell evit mont kuit eus ar milendall. Perzh kentañ ar publik a vo diarbenn gwallaoz. Ar muzik, ar c’hanaouennoù o deus ur perzh bras er c’hoariva a-stroll-mañ. Hag ar margodennoù ivez !

Pezh-c’hoari David Wood lakaet e brezhoneg gant Bob Simon ha Bláithín Conneely-Allain.

Komedianed : Bob Simon, Bláithín, Conneely-Allain,, Bleuenn Raynaudon-Kerzerho,, Emmanuelle Huteau ha Marguerite Danguy des Déserts.

DOUAROU NATAE

Park loened “Douarou Natae” (*Les terres de Natae*) zo bet digoret e miz Mezheven 2022 war-lerc’h ma oa bet e-pad un 50 vloaz bennak Zoo Pont-Skorf.

Ur sell nevez eo hini ar skipailh a zoug ar raktres. E bal : sikour da wareziñ ar spesoù en arvar e framm programmoù etrebroadel war un dachenn a 14 ha gant koadeier, pradeier, ha ruzelennoù.

Skoazellañ a ra Douarou Natae meur a gevredigezh a warez an natur e broioù evel Madagaskar pe an Nepal peurgetket. Degemeret e vez stajidi, studieren, kevredigezhioù, arzourien...

Koulz eo soñjal tremen un devezh er park evit tañva e binvidigezhioù, kavet e vez peadra da zebriñ ha plas a zo da azezañ evit ar re a zegas o boued...

Perak sevel un notenn a-zivout Douaroù Natae ? Peogwir eo stag skipailh ar park ouzh e wriziennoù breizhat, paneveken... Natae a vefe anv un doueez kelt. Taolennadurioù c'hwec'h, ergerzher breizhat brudet a sikour ar weladennerien da gavout o hent, en o zouez Odette du Puigauveau, Victor Segalen, Alcide Dessalines d'Orbigny... Ha, tra a bouez : kavout a raio Yann vrezhoneger un toullad pannelloù displegañ e brezhoneg dirak annez loen-mañ-loen. Ma n'eus ket kalz c'hoazh e tlefe kreskiñ o niver tamm-ha-tamm. Dreist-holl ma tiskouez ar weladennerien e plij dezho...

Ma fell deoc'h gouzout hiroc'h, kit war www.lesterresdenatae.fr

BREZHWEB

An distro-skol eo evit Brezhweb ivez ! Hag evit krogiñ gant ar bloaz skol nevez, e kinnigomp deoc'h deiziataer an distro-skol.

Ar skipailh a lak ar gaoz war traoù nevez embannet e brezhoneg, levrioù, podkastoù, darvoudoù pe c'hoazh, teñzorioù an niverel.

Hag ivez, war an tresadennoù-bev nevez a vo adkavet a-hed ar bloaz war lec'hienn Brezhweb.

www.brezhweb.bzh

BODADOÙ-LENN

Un tammig e pep lec'h, e Breizh e kaver bodadoù lenn evit ar vrezhonegerien.

Bez' ez eus anezho e Roazhon, e Kawan, en Oriant, e Brest, e Landerne-Daoulaz, e Lesneven, e Kemper, e Naoned, ha nevez zo

e Gwengamp. Kasit keloù deomp ma n'emañ ket ho podad-lenn war ar roll-mañ.

DISTRO-SKOL DIWAN _____

Kelaouet omp bet gant Diwan ez eus er bloaz-mañ ur c'hresk eus an niver a vugale enskrivet er c'hentañ derez (ouzhpenn 4000 skoliad.ez war ar 5 departamant). Padal emañ an niver-se a vugale o tigrskiñ e Akademizh Roazhon dre vras.

Siwazh e weler un digresk a vugale en eil derez abalamour, dreist-holl, da adreizhadur Blanquer al liseoù. Daoust da se e kendalc'h lise Gwened da wriziennañ er vro, ha kreskiñ a ra savadurioù hini Karaez c'hoazh.

Skol Savenneg he deus dilojet war gumun Prevenkel ha gant se o deus spi bezañ kevratet a-benn ar fin an abretañ ar gwellañ.

Daoust da nerzh dibar Diwan (diazezet war nebeut tud c'hopret ha kalz tud a youl-vat) e nac'h c'hoazh ar Stad C'hall lakaat da dalvezout ar c'henemglev Stad-Rannvro a oa bet sinet gant ar Rannvro e 2021 ! Ur spered enep da yezhoù rannvroel, c'hoazh, a laka distro-skol 2023 da vezañ unan eus ar re washañ e-keñver ar c'helenn e brezhoneg !

E fin al lizher-kelaouiñ e sav a-du-krenn tud Diwan gant familh ar paotrig Fañch bet droukziforc'het abalamour d'an dildenn c'hoazh. Stourm war bep tachenn a ranker ober, pa reer gant ar brezhoneg...

PRIZIOÙ UNVANIEZH SKRIVAGNERIEN BREIZH _____

E Ti al Levr Begerel, dirak un tolpad a dud, e oa bet pedet skrivagnerien d'ar 1^{añ} a viz Here 2023. Gant Unvaniezh Skrivagnerien Breizh e voe roet dezhe prizioù da c'haredonañ

anezhe evit ar skridoù dedennus o doa embannet e galleg, e gallaoueg pe e brezhoneg.

Kenstrivet e oa bet gant ar saverien danevelloù war un dodenn : « Gwelet em eus gouloù, ha me o vont tre... ».

1/ Anaïs Le Ruyet-Mahé evit he danevell dudius « Reolenn pennañ : Uvel e chomeoc'h »

2/ Bernez Géry evit e zanevell « Sirius, un den sirius ha fur. »

3/ Christell Chevallier-Gaté evit he skrid dedennus « Ur voudig bouzar ha mut »

Prizioù Pêr-Jakez Helias ar romantoù o deus garedonet tri levr dispar, bet embannet gant *Al Liamm* :

Priz kentañ : Yann-Charlez Kaodal evit e romant fromus *Fulenn*

Eil priz : Jerom Olivry da enoriñ e romant faltazi *Zadbora*

Trede priz : Yannig Audran, bet savet gantañ *Kan ar Mel* e brezhoneg saourus Gwened.

U.S.B. a drugareka an tiez-embann *Al Liamm*, *Skrid*, ha *Mouladurioù Hor Yezh*.

Gant plijadur e oa bet lennet ivez *Ar rastellerezh bras*, gant Bernez Tangi, *Disoudardet* gant Lan Tangi, *Didrouz war an treuzoù*, gant Pol ar Meur ha *Koktel ar vuhez 3* gant Jil Penneg.

Thierry Châtel, kadoriad juri ar skridoù brezhonek.



Al loreidi vrezhonek tro-dro da Thierry Châtel

20^{VET} DEIZ-HA-BLOAZ AN ALARC'H EMBANNADURIOÙ _____

Perak bezañ savet un ti-embann nevez e 2003 ?

Start e oa an traoù d'ar c'houlz-se e bed al levrioù hag an embann brezhoneg. *An Here*, ar brasañ ti-embann a oa o paouez klozañ ar stal evit meur a abeg, abegoù arc'hant dreist-holl. Kantadoù a levrioù a oa deuet er-maez e-pad 20 vloaz a-raok etre 1983 ha 2003, levrioù evit ar vugale hag evit ar re yaouank dreist-holl, met ivez geriadurioù, studiadennoù hag all. N'heller ket chom hep menegiñ ar geriadur hollvrezhoneg, un ostilh dibar ret da bep brezhoneger.

Al liamm a embanne levrioù abaoe ar brezel a oa bet staget ouzh *An Here* e 1999. Adlakaat a raio un nebeud bloavezhioù goude diskar *An Here* a-raok adaptapout e lañs war-dro 2006. Ar gelaouenn a oa chomet dizalc'h a gendalc'he da zont er-maez, ingal, bep eil miz.

D'ar memes mare, un ti-embann all, *Mouladurioù Hor Yezh*, bet savet gant Per Denez e-kreiz ar bloavezhioù 70 ne 'z ae ket gwall vat en-dro kennebeut.

Petra ober gant ar skridoù a oa bet kinniget pe kaset d'an tiez-embann-se neuze ?

Skrivagnerien zo a zeuas e darempred gant *Kuzul ar Brezhoneg* evit kaout ur respont. Setu da c'hortoz e vefe diskoulmet kudenn an embann gant *Al Liamm* hor boa soñjet, ma breur Divi ha me krouiñ un ti-embann bihan.

Da gentañ e oa ret kaout un anv hag ul logo, ur vleunienn, ur blantenn, un arouez keltiek ? Ma ! Perak ne vefe ket ul loen ? Un alarc'h, anavezet er c'hanaouennoù ha dreist-holl hini ar Barzhaz Breizh, aes da zresañ a c'hellfed livañ e ruz, melen, glas ha me 'oar hervez liv golo al levr.

A-drugarez da skoazell Per ar Bihan (Per Diolier) a roas peadra da embann e levr barzhonegoù divyezhek *Trema heolioù kuzhet - Vers des soleils cachés* hon eus staget gant avantur an embann.

Maoris Joubin a gemeras penn ar gevredigezh disklêriet ha diazezet er C'houerc'had.

An Alarc'h a zo deuet da vezañ ezel eus *Kuzul ar Brezhoneg* hag a-drugarez d'al labour stummañ ha difaziañ graet gant ar C'huzul e krogas *An Alarc'h* da embann ul levr pe zaou ar bloaz.

Lakaet hor boa da bal embann a bep seurt levrioù ha lakaat ar pouez war skridoù o tennañ da Vro-Dreger dreist-holl. Ar pezh hon eus graet hag a gendalc'her d'ober. Embannet hon eus skridoù tud evel Per an Intañv, Marsel ar Barzh, Erwan Kerou, Erwan ar Moal, Jarl Priel hag all.

Tamm-ha-tamm omp aet war-zu studiadennoù, geriadurioù, geriaouegoù, yezhadurioù. Krouet hon eus ur rummad anvet *Teñzor ar brezhoneg* ha lakaet war baper pinvidigezh hor yezh evit ma chomfe ur roud skrivet eus labourioù enklask ha dastum bet kaset da benn a-hed ar bloavezhioù tremenet.

Dictionnaire français-breton, Martial Menard, *Dictionnaire du breton du Trégor-Goëlo*, Vallée, *Le breton des rives de l'Aven et du Belon*, *La grammaire bretonne pour tous* da skouer ha meur a hini all.

Skrivagnerien zo a chom feal d'*An Alarc'h* abaoe bloavezhioù evel Mich Beyer, he romantoù a ra berzh ha tapet ganti meur a briz evito.

Lakaet hon eus war wel dizoloadennoù souezhus a-walc'h evel hini ar Rusianez Ekaterina Balobanova, desket brezhoneg ganti e Treger en XIX^{vet} kantved ha dastumet kontadennoù a zo bet embannet e rusianeg goude-se hag a oa dianav amañ e Breizh.

Troidigezhioù a embanner ivez, dreist-holl abaoe ma 'z eus eus programm treñ ar Rannvro a sikour an tiez-embann hag an droourien war ar memes tro da gas da benn e brezhoneg oberennoù lennegel anavezet er bed a-bezh.

Kinnigoù a bep seurt a vez kaset deomp, ar pezh a ziskouez ez eus tud barrek da skrivañ diwar-benn danvezioù liesseurt. Klask a reomp kinnig traoù disheñvel d'al lennerien, bras ha bihan, klask a reomp ivez embann c'hwec'h pe seizh levr ar bloaz, o c'houzout e kemer darn anezho kalz a amzer prientiñ, ar geriadurioù paneveken.

Katalog *An Alarc'h* a zo enlinenn war : www.brezhoneg.org

An ti-embann bihan, krouet war ar prim e 2003 ha na oa ket tonket da badout a zo bev-mat bepred. 132 levr a zo deuet er-maez en holl abaoe ar penn kentañ ha raktresoù hon eus da gas da benn evit ar bloavezhioù o tont.

Riwanon Kervella

STARTIJENNUSAT SOUEZHADENN

Yaou 28 a viz Gwengolo 2023-Skolaj Diwan Jakez Riou.

4e10 : A-vagadigoù fur-difur e tegouezh skolajidi, tud gour an ti ha studierien Kelenn zoken.

Ur plas a gav pep hini dindan ar bratell koulz war ur pallenn, ur bank pe ouzh ur voger.

4e18 : Tavet an trouz, evezh an holl war-c'hed.

4e19 : Gwisket gant o cheuc'hañ dilhad-leurenn e tegouezh un 40 kaner-ez bennak eus Laz-kanañ Sant Meryn.

4e23 : Goude ur ganaouenn digeriñ e tap unan eus ar baotred ar gaoz, sklaer ha kreñv, brezhoneg flour gantañ da zisplegañ d'ar re yaouank ar from hag an enor a oa gante da ganañ evit tud yaouank brezhonegerien an holl anezho, kentañ gwech evit ar strollad.

4e26 : Ha setu koroll ar c'hanaouennoù, lod laouen, lod siriusoc'h, lod da zañsal zoken :

An alc'hwez aour

An Intañvez

Brezhoneg

Kentañ klevet evit lod, lod all anevezet mat, ha tamm-ha-tamm ar skolajidi da grediñ mont da-heul hag astenn o mouezhioù gant re ar ganerien ampart. Ijinit hag e klevfet !

4e47 : Da glozañ gant an abadenn e oa tro Ar Vro Gozh... Ul laz-kanañ unanet a 220 den dindan ur bratell gozh leun a zoujañs hag a spi.

Nag un eskemm ! Skeudennoù tapet a bep tu, kozh ha yaouank, youl gante da virout seurt mare prizius en o c'halon kenkoulz hag en o memor.

Pedet ar re a fellfe dezho da vont da ganañ da Bloveilh bep Yaou
abardaez.

Trugarez deoc'h kanerien Sant Meryn

Ninnog evit Skipailh SDJR



©Ninnog Latimier

Laz-kanañ Sant Meryn dirak skolajidi Kemper